

«POBL VREIZH»

B.P. 304

29273 BREST-CEDEX

Koumanantou

Boutin : 10 lur

Skoazell : adaleg 20 lur

C.C.P. 2746-79 Rennes


MEURZH 1976

NIV. 76

1 LUR

POBL VREIZH

TROUS HA BRESEL EN AFRIKA !



(gweloud pajenn 3)

E-BARZH UDB EMA TOLPET AR VRETONED A FAOTA DEHE E VEHE LIBR O FOBL

Aet eo kalz ar-raog an emgann kulturel e-pad ar misoù tremenet. Chemel e ra neoazh ar gudenn gulturel, ur gudenn bolitikel. Pa weler gouarnamant ar Frañs e tispriñ kulturelloù pobloù ar Frañs, pa weler momp ne oul patred ar gouarnamant netra diarbenn ar c'hulturioù-se, nend eus ket a vout souezhet a gwirionez, pa ouler pesort tud eo ar re a zo e penn an traoù. Sellomp doc'h Chirac, mar karet. Petra an deus lâret ? Lâret en deus n'eo ket possibl lekad ar brezhoneg da vout hañval doc'h ar yezhoù bew arall e-barzh ar skolioù, pendeogwir n'eo ket e brezhoneg an heni e vez gwerzhet ar varc'hadourzh d'ar Russed pe d'an Amerikaned ! Kement-se a ziskouez pesort den eo ar heni a zo kentañ ministr ar Frañs : un den eo ha n'eo mad ewitañ nemed ar pezh a c'heller gouarnid argant getañ, ar pezh a zo rañtabl. James ne sell Chirac doc'h traoù arall, n'eo ket nec'het ged kultur ar Vretoned, ha neoazh stag enna ar c'hultur-se doc'h buhez hon pobl.

Boud zo kalz tud e-mesk ar Vretoned hag a oul kement-se, factañ 'ra dehe kann ewid ma vo graet ul lec'h a-fesson d'ar brezhoneg ha da guttur Breizh e-barzh hon bro. Mes red eo, red mad stagñ an emgann kulturel doc'h an emgann politikel, rag, ma 'h eus bet graet bresed d'ar brezhoneg ha ma vezer bremañ e klasik e vougñ, ewid mad, kement-se a venñ lâret enna Breizh ur c'holori. Hag e vez gwaestet armetri ged kapitalist ar Frañs (ha re Vreizh ive, daousto mar nend eus ket kale anehe) ha ged re an Europ, ha re an Amerik.

Setu enna red kann ar oll an dachennoù ar-un-dro. Ne vo roet ul lec'h a-fesson d'ar brezhoneg ha da guttur Breizh ur vro-mañ, nemed pa vo diazezet ar sossialism e Breizh.

Hag ewid diazezh ar sossialism, enna red goued mad ar pezh a glasker ober. Gouedo a raomp, hiziv an deiz, strolladoù politikel a Vreizh e voned d'an dias, dre ma ne ouinet ket dre just ar pezh a glaskont, ha daousto dehe lâret ur sort eh int sossialist. Nend eus ket gwerso enna bet savet ar FASAB, ged pewar strollad : nend eus mui nemed daou anehe e-barzh. Aes a-walc'h e oa d'an dud komprou ne c'heller ket ar FASAB chemel en e sav ged strolladoù ken laosk ha ken bresk ha SAV, «Stourm Breizh hag ar CAB. Ha ne lârimp ger ebed a-zivoud ar pevarved strollad, ar PCB ; hennan n'eo ket bet gwalet james ewid gwir ar leunenn bolitikel, ha bremañ enna aet e moad, pechañs : ne vez ket mui komzet anehoñ.

Tamall ar stourmerion a zo aet e-barzh ar strolladoù-se n'eo ket un dra d'ober. 'Vel reson, mes red eo disklañ pegen gvan, pegen dister, eo ar strolladoù-se ha pegen ber skiant politikel ar re a zo er penn anehe : ober a raont en o skridoù ged genoù ag an tu kleiz, mes n'o deus james naket frammet a-fesson o strolladoù, 'vel ma weler frammet ar strolladoù a zo demokratel ha sinus.

UDB zo ur strollad hag enna red kantañ getañ muioc'h-mui ar dachenn bolitikel. Ur strollad sinus eo UDB : memb ar re a zo lekadet dies geti enna red dehe ansav kement-se. Mes, ewid ober a Vreizh ur vro sossialist, mestr armetri hec'h-unan, dober he deus UDB ag an oll re o deus komprenet ne vo amzer-da-zoned ewid Breizh en diavaez ag ar sossialism.

Dober he deus UDB ag oll nerzh hag a oll feiz ar Vretoned douget d'ar sossialism : 'vel-se e tay pobl Vreizh a-benn, da vout ur wr bobl, unnet dam-ha-dam ged oll bobloù ar bed.



TROUS E BRO SANT-BRIEG

D'an 12 a vis Genver, labouradeg an D.M.B. e Plerin zo bet ac'hubet gant he micheroured.

En usin-se, e vese graet da gentañ traoù en ler hag e-kerz 1972, e oa bet prenet gant ar SAVESAB, ur sossieted all deus kostez Tours hag a ra malennoù dreist-holl. Beteg 1975, e seblante an traoù mont war wellad ewid renereñ Savebag, rag ouzhpenn kaoud 70 micheroured e Plerin, o doa savet ul labouradeg all e Pordig ha krouet 45 impilj all.

E keli-se e oa bet krouet lwez gant ar micheroured ur gverenn C.G.T. a ra berzh. Ewel-just, se na blijte ket da bennoù bras ar Savebag o doa aon e vije bet astennet kement-mañ e-barzh o unioù all. E miz Du 1975, heb lâret d'ar «Comité d'entreprises ar Savebag a gas keloù da 44 micheroured e vo tennet o labour digante e miz Genver en deusep da zisñ an «Inspection du Travail».

Goude-se, ar renereñ o doa diviset serrñ labouradeg Plerin, hag adavel anez e lec'h all, ha n'em zisober deus ar 70 micheroured e oa e Plerin.

Bremañ ar micheroured o deus ac'hubet an usin, harpet ewid-se gant ar CGT, CFDT, FEN, ha gant ar strolladoù deus an tu kleiz ha sikourt gant tud Sant-Brieg a oa re vad petra eo «Politikerezh ekonomikel ar gouarnamant e Breizh».

Ar micheroured-se a zo e sell-mad :
- Kaas ar renereñ dirag al les-vern
- Goulenñ ferm digant ar gouarnamant klask diskoulmout d'ar c'hudennoù-labour a zo e Breizh bremañ.

Kevrann Sant-Brieg

Kevrann Sant-Brieg

GERIOU

N'TINT KET ANAVAZET EN OLL RANNEZHOU

t : tolpet ; bodet ; ar ; war (ar-raog, ar-un-dro) ;
ch : chom ; momp ; memes ; ne oul ; ne oer ; diarbenn ; diwar-benn ; nend eus ket o vout souezhet ; n'eo ket da vezañ souezhet ; boud ;
h : hañval ; all ; heñval ; heñval ; ged, gatañ, geti ; gant, gantañ, gant ; newash ; koulskoude ;
b : boud zo ; bez-ze eus, bezañ zo ; oll lec'h ; tur pilob ;
e : klasik ; o klasik ; kement-se a venn lâret ; kement-se o sinifi ; anezh ; eus ;
g : gousoud, goud ; a Vreizh ; eus Breizh ; a voned d'an dias ; o vont d'an traoù ;
ur : ur ; memes vro ; nend eus ket gwerso ; n'eo ket pell zo ; ar-ved ; diwar-benn ;
pe : pechañs ; mechañs ; 'vel reson ; ewel-just ;
ag : an tu kleiz ; eus an tu kleiz ; naket ;
 kenneboud ; dober ; ezomm ; ofañ.

GERIOU DIAES DA LOD :

ku : kudenñ ; problème ; kana ; se batte ; strollad ; parti ; organisation ; frammet ; structure.

AR BED en-dro dimp

SICCNA SANT-MALO

Studet eo bet gant Kuzul-Sewenñ UDB, bodet e Kares d'ar 15 a vis Genver 1976, stad labourerien SICCNA Sant-Malo, hag a zo an diabarrek teknikel, deg miz 'zo bremañ. Goude m'eo yac'h ar stal, ena ar gopitalisted vras en soñj da serrñ anez. 450 den a n'em gavfe heb labour, heb kantañ ar re 'zo o labouradeg an usinoù all a bourvez darvez d'ar SICCNA.

Kement-se a laka war-wel ar politikezh dilijan industrioù Breizh a zo o ren e reus a pob lec'h : ar boteller-ler e FOUGERES, Donval e ROSPORDEN, Sogarnat en ORIENT, Savebag e PLERIN, pri-gwenn BERRIEN, ADP-MONTROULES ha GWENGAMP !

P'ema stad ekonomiezh ar vro war fallaad avalese, e choulenn UDB digant labourerien Breizh, an em unaññ ewid difenn o interestoù.


AR MARW D'AN DORFEDOURIEN PE NANN ?

Hauget omp bet gant ar pezh a zo bet kontet deomp goude marw ar paotrig bibañ Futag lec'het gant un den youank a 24 vloaz o klas argand a beb tu. Spontet omp bet ouzhpenn gant an doare impliget gant ar muntrer pa ne oa nemed di-fotiañ warnañ.

Ur vevzh eo gwelad tud, o vevañ laouen er bed kapitalist, sevel digarizioù dispar a-du gant pe a-eneb d'ar gondoni-digedez d'ar marw. Kirieg int d'an torfedoù. Ne lavaromp ket da doud an torfedoù peogwir e vo bapred traoù fall ket ha ma vo gwastet ha mouezet war an douar. Kirieg int d'o niver kresket koulskoude.

AN IMPERIALISTED EN AFRIKA

Trous ha bresed adarre e pobl-korn eus Afrika. Enna kolonioù diwezhañ an Douar-bras o klas bezhañ dieub, pezh n'eo ket aes dre ma klasik an imperialisted c'hom, krog ar vro, mod pe vod : en ur sikour emevioù levesonet gante, en ur leuel soudardied, pe c'hoazh en ur breañ mangliezioù pe douar da veñ kampoù ewid touristed potmer o yac'h.



Duzhpenn-se, o deus graet berzh sioù imperialisted Europa e-toues mear a renere stad an Afrika. Ne gomzomp ket hebken eus Afrika ar C'hreistez, med lwez eus ur vro ewel ar Marok, Roue ar vro-mañ a zo herve-rik eus a vistri gozh : ar C'hallaoued. Klasik a ra koloniañ ar bobl Saharal ha leurel e grabenoù war mangliezioù foatf Sahara ar C'hornog.



KENDALC'H ETREKELTIEG 76

«Kendalc'h Etre-Keltieg 76» a vezo dalc'het en Enes-Vanaw eus an 19 d'ar 24 a vis Ebrel.

Kaas a vo er kendalc'h eus dazont ar broioù keltieg er bloavzhioù 80.

Ur vro gær-tre eo Bro-Vanaw, hogen leun a Sisoen eo e-pad an haf, Plijusoc'h 'so da welout da Bask ewid galloud kejañ gant tud ar vro.

NE VO KET KENDALC'H MANAV UNAN BRAS MOARVAD. KOUISKOUDE, E VEF MAD EZ AFE UN TOULAD BRETONED ASE DA ANAVAZOUD AR VRO HA DIARNEPREDI GANT KETTED ALL A BEB BRO.

E soñj enna ar C'hendalc'h da gosañ ar veaj ewid ur pris deread, war-dro 340 lur gall ha martese nebeutoc'h ewid ar re dindan 21 bloaz.

Ewid diskleriadurioù hiroc'h, skrivañ da :

«Kendalc'h Keltieg» - L. CHAPEL Roc'h ar Bleiz - 29210 MONTROULES

Piw a ra skouerioù spontus ma ne vez ket ar re binvidikañ o tagañ yac'hed al labourerien, o c'hoari gant o buhez, o c'hoari gant buhez ar vuagle zoken, o kaas-degasa o argand brin a-dreus bevnoù ar broioù ?

Piw a les da vervel milionoù a dud eus an «Treded Bed» ? Piw a zo oc'h ober gant ar vuhez ar breselioù (Vietnam, hag all) ? Piw a sav filmoù, leorioù, sonerezh, hag all o lakadetech ouzhasañ ar c'hovr da zwan, dreist-holl an daerjenn (ar rustoni) hag an hudonizh ? Piw an deus tennet, diouzhtur heb labour, gant ar Vad hag an Divad hon eus ezomm muioc'h eged biskoazh gant ar vuhez diroll lakad dirag hon diaouladeg hervez bolintez ar skrapieren-argand ?

Daoust gwig ez eo ur sousezh gwelad tud gwann, diast, diran o veskañ ar gwir gant skeudennoù dreist-natur an arvestoù ? Ne vo ket gweloc'h an traoù, ket ha na vo ket flastard rouantezh an argant ha roet e lec'h d'ur vuhez graet ewid al labourerien...

En Angola e seblant bezañ trec'het an M.P.L.A. (Strollad eus an tu kleiz ewid dieubdigedez an Angola) war ar strolladoù all, harpet gant an Amerikaned, gant Afrikaned ar C'hreistez ha gant gopredadied eus Europa.

E Djibouti, e choulenn an darn vrasañ eus an dud dieubdigedez ur vro. Hogen, n'eo ket kalz a bres war Vro-Chall da leuel pobloù Aochou ar Somali da ren o-unan o aferoù. Setu ez eus bet trous hag e vo c'hoazh moarvad dre ma kresko leveson an F.L.C.S. (Tadenn ewid dieubdigedez Aochou ar Somali) falloud a ra d'ar C'hallaoued mireoud soudarded du-hont, arised ewid difenn ar vro eus ha amesian.

An digarez ha netra ken ! E gwirionez, n'eo ket gwali gontant ar Frantziskan o weloud brusnoù diwezhañ an «Unvaniezh C'hall» o lâret kaoc'h d'ar «Vamm-Vio».

Memestra, an traoù ewid pezh a sell ouzh Insi Komorra. Tair enna war beder o kroum eus an diaspac'h hag a zo chomet gall. Piw a oar just awal'h penaos ha perag ?

Aes e weler mad o deus bolintez ar Broioù Imperialist da chom en Afrika stumm pe stumm, zoken ewid dastum brusnoù med aliesoc'h, ewid tennañ o mad eus pinvidigezh an Douar-Bras-se ha stourm eus an diaspac'h hag a zo un dra red koulskoude ewid amzer da zont Broioù-Afrika.

PENNAD-KAOS

GANT...

PER AR BIHAN MEROUR AL LIAMM



Per ar Bihan

PV — Anavezet eo AL LIAMM gant kalzig a dud bremañ e Breizh pe d'an nebeutañ, e-toues ar re a ra war-dro ar brezhoneg pe a zo dedennet gant ar brezhoneg. Med ar pezh ne oar ket kalz a dud marteze, eo pe da vare, pegoulz, ha gant ploc'h eo bet savet AL LIAMM ?

P BIHAN — Ya, AL LIAMM "zo bet savet e Paris gant Bretoned Paris neuze ar bloavezh c'hwezh'ha daou-ugent da lavared eo goude ar bresel kasi diouztu. Ha ni oa un toulad re yaouank ha boutmet omp bet gant ar re a ra war-dro ar gic'h-gelouenn SAV.

PV — Ya, boutmet oc'h bet evit ma lavant, med pere oa neuze ar palioù hag a oa o ren d'ar c'houlz-se ?

PB — D'ar mare e oamp troet un tamm war-du ar broioù, Keltieg, neuze, hor boa bet soñj kaoud darempredoù ganto ; e niverenn gantañ AL LIAMM "zo bet moullet pennadoù e kembraeg, en iwerzhoneg da skwer. Ha klasket on eus kaoud darempredoù gant an dud tremse, sañset o skozzellañ Breizh d'ar mare-se.

PV — Neuze, ho pos nebeud a lennerien e Breizh d'ar c'houlz-se ? Rag an dud a c'helle d'ar c'houlz-se kompren ar pennadoù embannet war AL LIAMM a oa nemestra ral o niver e-barzh ar vro ?

PB — Ya, eveljust, med, memestra, e-pad ar bresel e oa bet embannet kalz a vrezhoneg bez eo tud o goust da lenn ha klask a raemp ivez adkavout al lennerien a oa bet e-pad ar bresel d'ar c'helouennou hag ar re a oa bet a-raog zoken eveljust. Ar c'helouennou e-pad ar bresel a oa troet un tamm ispisial peogwir o doa an almaned un tamm levezon wam.

PV — Neuze, daoust hag oc'h deit da adkavout al lennerien a oa deuet d'ar brezhoneg e-pad ar bresel hag ouzhpenn da gaoud lennerien neuze ?

PB — Ya, eveljust hon eus kavet lennerien e-toues ar re a oa dedennet gant ar brezhoneg a-raog. Med tud a zo bet skot gant ar bresel ha n'int ket bet stajet ouzh ar yezh med reoù neuze a zo deuet eveljust.

PV — Daoust hag ar pennadoù a embannec'h d'ar c'houlz-se, stag tamm-penn ouzh an emsav etrebekieg a oa ar pezh a c'hortoze al lennerien neuze ?

PB — Ya me' gred e ant. Da gentañ, hon eus moullet dreist-holl studiadennoù ha goude-se, omp en em droet muioc'h war-du al lennegezh. Hervez e plije muioc'h d'an dud lenn pennadoù lennegezh eged studiadennoù d'ar mare-se. Neuze omp en em laketae da voutañ danevelloù ha barzhonegoù ha choulet eo AL LIAMM un tamm e-gis-se oc'h ober war-dro al lennegezh kentoc'h.

PV — Hag evid dibab ar pennadoù, pesurt skriturioù a oa genec'h d'ar c'houlz-se ? Talvoudegezh ar yezh da gentañ, pe hin an darvez ? Ha pesurt darvez neuze ?

PB — D'an derou, e gwirionez, ne gavemp ket kalz pennadoù hag hon eus o savet ni hon-unan ha ni, tud yaouank, ha ne omp ket deskat c'hoazh war ar yezh. Eveljust, ar brezhoneg ne oa ket draist moarvad, rag ni oa o teskiñ ar vicher ha goude-se, tamm ha tamm, peogwir e kerc'h-he ar gelouenn memestra ez eus deuit tud o doa muioc'h a vicher hag a skrive derastoc'h, skrivagnerien e gwirionez, a zo deuit tamm ha tamm.

PV — Daoust hag-ef e c'hellit reñf deomp un nebeud hanvad e-toues ar skrivagnerien, brezhoneg med ganto, hag o deus embannet studiadennoù, pennadoù pe barzhonegoù, e-barzh AL LIAMM. Pere eo d'ho menno ar re a oa ar gwellañ brezhoneg ganto ?

PB — Da skwer, Fañch Elies a zo deuit buan a-walc'h hag a skrive ar yezh flour a-walc'h ha Youenn Drezen ef ivez, a zo deuit buan. Roparz Hemon, eveljust, an holl dud n'int ket a-du gant e yezh med memestra e vrezhoneg a zo talvoudus ha kalz a re all c'hoazh. Skrivagnerien anavezet evel Maodez Glanndour ha reoù all o deus kaset pennadoù. Kerlenn, da skwer ; Kerlenn ne skrive ket kalz, med skrivañ a raed pa skrive.

PV — Pesurt soñj a oa genec'h p'ho peus klasket skrivagnerien hag e oa lakaomp gwelloc'h brezhoneg ganto ? Daoust hag e oa evid ma lennfe ho lennerien pennadoù skrive en ur yezh c'hlanoc'h pe neuze, daoust hag e oa se evid lakaad tud all da lenn brezhoneg, tud ha n'o doa bet deskadurezh ebet en o yezh, pe zoken an daou assambles, marteze ?

PB — Ya, kompren a ran. Ar gudenn a zo diases awalc'h, rag ur pal hon doa : embann traoù deread, traoù mad zoken, hag o embann en ur yezh aas hag a vije komprenet gant ar muiañ posubl a dud. Hag ar pal-se a zo diases ; an daou bal a zo kontrol an eil d'egile med klasket hon eus lizhoud an daou assambles hag an lizhoud an daou dibab a-raog kontañ a raomp un toulad mad a goumananterien ha breged ar pennadoù o deus ul live n'eo ket uhel-tre marteze, med hag a zo deread.

PV — Daoust hag e c'hellit lavared deomp dre vras piw eo ho lennerien. Daoust hag int, dreist-oll, tud deskat hag o deus studiet ar brezhoneg "tel din laroud ?

PB — A bet seurt tud hon eus, eveljust, med "pezh a zo da venegeñ eo n'ous ket kalz, da skwer, a vicherourien e-toues al lennerien ha n'hon eus ket kalz kennebeud a beizanted, a-hend-all, hon eus kentoc'h kelennieren, skolaerien evel-just, hag implidi, kenwerzhourien, tud e-gis-se hag, evel-just, kalz a studierien hag a zo o teskiñ pe o peuzeskriñ brezhoneg.

PV — Ya, ees eo kompren n'ho peus ket kalz, nag a vicherourien, nag a beizanted kourmanter d'ho kelouenn, med kredañ a ra dec'h e c'helle lakaad ar pezh a vez embannet paizanted pe labourerien da lenn e brezhoneg ? O c'housoud mad eveljust eo diases kenañ peogwir ne vez ket kelennet ar yezh.

PB — Ya, me 'gred memestra e vije kavet mad ganto pezh a vez embannet med siavzh, n'o deus ket desket lenn eveljust, diases-tre e vije deuz lenn brezhoneg med me "lar un dra memestra, moarvad ma vije kalz deus al lennerien-se tud deus ar bobl, labourerien-douar, michourien ha pesketourien, moarvad, e vije kenmet ar pennadoù a skrivomp.

PV — Setu ur goullenn a oan e soñj ober d'iganeoc'h : daoust hag e embannec'h an hevelep pennadoù ma ouffe an holl lenn brezhoneg ?

PB — Ket, me 'gred e vije cheñchet.

PV — Ha gant pesurt hent ez afec'h kentoc'h, pesurt hent a dalvezfe muioc'h ma vefe an darn-vrasañ deus al lennerien, tud o labourad pe war-ar-maes pe en usañ ?

PB — Se zo diases gousoad ha gousoad "pezh o dije c'hoant an dud da lenn, med n'ousomp ket re, red 'vije neuze studiat ha mont da c'houlenn diganto ha ni a c'houlenn breged gant al lennerien "pezh o deus c'hoant kaoud hag al lizhiri a zo niverus e-barzh AL LIAMM hag an dud a lar "pezh o deus c'hoant kaoud ha ni a heul ar memostad a vez roet deomp, ni a bleg diouz ar goullennou, neuze ar gelouenn a vije dihervef moarvad ha ni a vije red deomp kenañ.

PV — Marteze, a vefe red goullenn gant an dud skrivañ o-unan, pe breged pe diwezstoc'h pe ouis an dud lenn brezhoneg. Daoust hag ho peus klasket ur wech breged lakaad al lennerien o-unan da skrivañ ?

PB — Ya, eveljust, rag ni "zo klask pennadoù rag n'eo ket ken aas se kaoud pennadoù. Ni a glask dije lakaad al lennerien o-unan da skrivañ, pezh a zo ur gudenn diases all, rag an dud o oar skrivañ mad n'int ket niverus ; se 'zo ar vicher ivez, med dreist-oll e brezhoneg marteze.

PV — Ya, kompren mad a ran.

PB — Neuze, un toulad mad a bennadoù hon eus, med red eo ober un dibab rag kalz a bennadoù n'int ket re vad.

PV — Ya, da lavarout eo, o skrivañ brezhoneg n'ous ket a dud ndiaska. Dreweh e oa tud ndiaska a save karemaennou pe gantadennou.

PB — Ya, ya...
PV — Med ur goullenn stag deus ar goullenn-se : daoust, memestra, hag eo bezañ bremañ ober un dibab etre ar pennadoù a vez kenniget dec'h. Da larad eo, daoust hag ho peus bremañ, muioc'h a zarvez da embann ? Niverusoc'h ar pennadoù a vez kenniget dec'h ?

PB — Pas kalz, hag e-pad ur mare, me gav din e oa muioc'h a dud o skrivañ. Bez e oa nebeutoc'h a dud a ouie lenn brezhoneg med muioc'h a skrivagnerien a oa.

PV — Da lavared eo, n'ous ket, tud neuze, tud yaouank neuze evid kerner klus ar re a zo aet d'anou, Jakez Riou, Youenn Drezen, hag ar re all.

PB — N'ous ket kalz ! Bez az eus un toulad mad a skrive en un doare mad ; n'ous ket kennet-se c'hoazh a re yaouank. Menegiñ a ran P'riou da skwer, e-neus skrivet "barzh AL LIAMM : mibien Ronan Huon da skwer a skrive ha re Per Denez, med e gwirionez, a toues ar re yaouank, n'ous ket kennet-se a skrivagnerien. An dud o deus marteze nebeutoc'h a amzer evid skrivañ. N'ousomp ket.

PV — Pa nebeutoc'h a c'hoant ? Ha koulskoude, ez eus muioc'h, bremañ, a dud yaouank deskat war o yezh eged na oa e-pad armer Youenn Drezen pe Jakez Riou. Penaos e c'helle neuze diskleriañ a vefe nebeutoc'h a dud o skrivañ brezhoneg ?



PV — Peb hani a oar eo diases-tre embann ur gelouenn vrezhoneg, diases kaoud tud hag a goumanant ; n'ho peus ket kalz arc'hant, sur mad.

PB — Ya, an traoù-se 'zo gwir hag un niverenn da skwer a goust pemp mil lur a vremañ.

PV — Pemp mil lur : pemp kant mil lur kozh.

PB — Ya, kalz tud memestra a skriv pennadoù berr pe danevelloù, med da skwer, romantoù, n'ous ket kalz.

PV — Med neuze, petra a vank deoc'h ? Ar pezh o doa ar re gant an aeven bezañ douget gant ar yezh, a-venet gant ar yezh hec'h-unan ?

PB — Ya, en un doare, me 'gred marteze ar strolladoù politikel beteg bremañ n'o doa ket pladet a-walc'h marteze gant ar yezh, ha neuze, o levezon war an dachenn-se a oa distar awalc'h. Bremañ hen goud a ran, e vez cheñchet un tamm pene d'ar yezh ; marteze dre-se e tevio muioc'h a c'hoant da dud yaouank da skrivañ e brezhoneg.

PV — Ha petra "soñj deus brezhoneg ar re yaouank ho peus menget. Daoust hag eo brezhoneg mad ? Brezhoneg a c'houl bezañ gwellaet ?

PB — Ur gudenn diases awalc'h, evel ma larez ez wont bremañ d'ar skoll-veur ha neuze un anaoudigezh diou awalc'h o deus. Se 'zo mad, med a-hend-all ivez, ez implijont gerioù skiantek, gerioù newez, gerioù armez, e vije lavaret marteze, re war an tu-se ez eomp zoken.

PV — Ya, hag o yezh marteze n'ho deus ket ar sason hag a oa gant yezh ar vrezhonegieren goshoc'h.

PB — Nann marteze ; med bremañ ez eus tud memestra gant an eaddivisoù da glewouad brezhoneg med memestra hag an dud a gomz er radio, an tele a gomz en un doare mad awalc'h ivez, neuze eo posubl d'an dud bremañ, pakoud da skwer ur poues-mouez gwelloc'h eged araso.

PB — Nann marteze ; med bremañ ez eus tud memestra gant an eaddivisoù da glewouad brezhoneg med memestra hag an dud a gomz er radio, an tele a gomz en un doare mad awalc'h ivez, neuze eo posubl d'an dud bremañ, pakoud da skwer ur poues-mouez gwelloc'h eged araso.

PB — Pemp kant mil lur kozh.

PV — Ped a dud 'zo oc'h ober war-dro ar gelouenn evid lakaad anez da zont ar-maes ?

PB — Pev ar pemp oc'h ober war-dro. Un tamm skozzell hon eus memestra : tud evid rezhañ ar pennadoù, kaoud kourmanterien all. Lavaromp ez eus flag o labourad med pevar pe bemp o deus ar brassañ samm war o c'heln.

PV — Ewid ar pred ne santer ket e vefe red kamm e doare pe zoare ar gelaouenn ?

PB — Red eo cheñch memestra. Se 'zo red, rag red eo plegañ ouzh ezchommoù an dud ha sellout ivez ouzh ezchommoù ar bobl, disesterioù ar bobl un tamm, en notennoù da skwer, eo posetañ kaout harve deus ar pradennoù-se hag ar barzhonegoù ivez a-wechoù memestra, al lennegezh a zo troet un tamm war-du an engann med bremañ, al lennegezh a zo ur benveg er stourm.

PV — Ewid ar pred ne santer ket e vefe red kamm e doare pe zoare ar gelaouenn ?

PB — Ya, kresket mad rag muioc'h a dud a studi brezhoneg bremañ, muioc'h a dud a oar lenn, a oar mad ar brezhoneg bremañ. Eveljust, e vije muioc'h c'hoazh marteze med kalz a gelaouennoù all 'zo.



Michañ Pobl-Vreizh

PV — Ur goullenn all, neuze : petra a soñjet deus Pobl-Vreizh ?

PB — Ma, Pobl-Vreizh a lennan bepred gant plijadur.

PV — Ya, ha pennadoù hag a zo embannet e-barzh Pobl-Vreizh a c'helle bezañ embannet ivez e-barzh AL LIAMM ?

PB — Me 'gred ewid lod anezo, ya, embannet hon eus pennadoù a seurt-se. PV — Na wellt ket e vefe un diforc'h, ur fos bras, etre seurt pennadoù a vez embannet e-barzh Pobl-Vreizh ha seurt pennadoù a vefe embannet e-barzh AL LIAMM ?

PB — Nann, ewid 'pezh a sell deus ar spered, pezh a sell deus ar stumm, marteze. Med ewid ar spered, ne gredan ket.

PV — Mad ! Trugarez.

Komzoù dastumet gant Y. Dongi hag Herri Gourmelen

UR STAJ POLITIK E BRO-NAONED



E kement micher 'zo, ez eo red kaout tud varreg, tud o c'housoud o micher. Hag ur vicher eo ar politik ive, tamm-pe-damm. N'eo ket ur vicher ewid bewañ, ewid gouzout e damm kreun ! Med red mad eo anavoud pizh lezennoù ar politik, hag ive anavoud an istor, istor ar bobloù, istor an emgannoù politikel ha sindikalel. N'eo ket trowalc'h bezañ leun a nerzh-kalon, red eo lakadur ur bern traoù e-barzh ar pen, peb heni en e blas...

Lenn levrioù politikel zo d'ober ewel-just, med ive mont war an dachenn, ha dont a-benn tamm-ha-tamm da c'housoud gwelloc'h pere eo lezennoù diabarzh ar politik.

Diouzh he zu, e teu UDB da vevañ kreñvoc'h, muioc'h anavez, hag all. Setu e oa deuet ar mara d'en em sossial muioc'h ive eus deskadurezh politikel an emsaverien. Forzh pegen desket e vezer a-hind-all e c'heller bezañ displez war an dachenn politikel. Setu ez eo red mont d'ar skol adarre, d'ar skol politik ar wech-mañ. N'eo ket traoù a vank da zeskñ : petra eo ar c'haptialism ? Penaos eo deus da vezañ ken kreñv ha prest da vougañ an dud vunut ? Penaos emañ stadou zo a-du gant ar sistem kapitalist o roñf dehañ kement a zo azomm ewid dont da grefvaad c'hoazh ? Penaos e c'heller e ziskar ? Petra eo ar sossialism ? Peasort sossialism zo mad ewid Breizh ?



Tud U.D.B. o studiñ en Naoned

Deuet 'oa c'hoant da veur a heni en UDB mont d'ar skol, ha setu perag e oa bet diviset gant ar Burew Politikel, sevel ur staj «Stummdigezh» d'ar 6, d'ar 7 ha d'an 8 a vis C'hwevrer. En Naoned eo ez eo bet graet ar staj-se ewid ar wech kentañ. En Naoned eo ez eo bet fellat da UDB kasa hec'h emsaverien, ewid roñf da c'houd d'an oll ez eo bet hag emañ dalc'hmad An Naoned hag al Liger-Atlantal e-barzh Breizh ewit, daoust m'eo bet lakaet e divaez hon bro hag espres-kber ewel-just, gant tud ar Galloud.

Ya, «An Naoned e Breizh» : a-du krenn emañ UDB gant ur sort slogan, disaset war wirionez an istor. Beteg pelec'h e kredet tud ar gouarnamant mont ewid strobinañ tud Bro An Naoned ? E-pad staj An Naoned, ez eus bet kentelioù, hag ive kendivision : emsaverien

eus hon Strollad e oa an oll glemmerien. Komzet ez eus bet eus :

- Stummdigezh politikel hag ekonomikel, diwar deorienn.

- Stummdigezh pedagogel pleustreg : deskiñ komz ha skrivañ al langaj politikel, penaos elenns ar c'heteier (gouzoud mad petra 'vez kavet e-barzh, petra ne vez ket ; perag e chomer mud war draoù 'zo, perag kement a safar war draoù all).

Deuet e oa d'An Naoned forzhig a emsaverien eus UDB ha laouen int bet gant ar staj, an oll gwtibunan. Bourrabed e oa : asoc'h-a-se ha plijusoc'h-a-se e oa labourad. Savet 'vo c'hoazh, ha muioc'h-mui, stajou a sort gant heñañ, ewid ma c'helle ar muiñ a dud e-barzh UDB mont da skol ar politik, ha bezañ barrekoc'h ewel-se da gass war-rao o stourm, ewid brassañ mad labourerien hon pobl-Vreizh.

OSPITAL PSIKIATREG

HANW : LEONID PLOUCHT
OAD : 37 bloaz
BROADELEZH : UKRAINIAD
MICHER : Matematikour
KLENNED : SKISOFREN



perag ez on a-du krenn ma vo dispartiet BRO-UKRAINA diouzh BRO-RUSSIA... Gant ur VRO-UKRAINIAD dizalc'h hermetken e vo pouzout sevel ur gwer sossialist ha saveteñ ar sevenadur ukrainiad !

Biskoazh kement-all ! War a seblant n'ema ket BRO-UKRAINA gwir esel eus aocour ar Broadoù-Unanet (ONU). PLOUCHT n'ema ket a-du koulkoude gant memosoù SOLJENITSYN, ur skrivagner bras a-dre-our, med daoust da vevañ klistourm, PLOUCHT zo chomet markour, komunour zoken, hag ar sossialism a bij dezhañ ar muiñ eo heni DUBCEK, heni newez-hañv PRAGA.

CHIRAK oa laouen-tre o tegemer un den gwallgaset gant ar «gomunourien» hag o tskouez d'un oll pegen braw ha bras eo BRO-C'HALL, BRO AL LIBERTE ! Ya, med chomet eo e fri war ar gloued goude bezañ klevet disklennadurioù PLOUCHT : «Mañ e vije dezhañ, emezhañ, chom heb kousad diwar-benn ar politikerezh !»

Ar paour-kaezh Ukrainiad a ranko chom sioul, peotramant e vo kaset marteze dioug Les-Vern-Surestec ar-Stad ha toulbac'h'et gant Breizhis ha Korsikis... otonomisted ewit.

Ha ma n'eo ket ur savalc'h en toulbac'h, roet vo dezhañ medikamantoù lapaial leizh e c'henoù ha pikurennoù a-zoare, rag e BRO-C'HALL ive, bezit dinec'h, e vez roet bab seurt traoù d'ar brisonidi, ewid sioulant ar re a seblant bezañ ne droug, dajrhus ha taer.

NOTENNOU

GERIOU N'INT KET ANAVET EN OLL RAH-
YEZHOU : tud varreg ; tud kopobl ; e
c'housoud : a ouled ; diouzh ha zu : doct ha
zu ; e teu da vezañ : e ta do vout ; deuet ;
doat : azomm ; dobar, ofar ; meur e hani ;
meur a unan ; beteg palezh ; beteg men-
strobinañ : lorbñ ; eus hon strollad : rag hon
strollad ; gwtibunan : kuit heb unan, rach an
dud ; bourrabed : laouenedigezh ;
STUMMIDIGESH : formation ; pleustreg : prati-
que ; bourrabed : ambinance.

KOUMANANTIT DA

LE PEUPLE BRETON

B. P. 304 - 2873 BREST-CEDEX

HANW SADEZ
CHOMLECH

a gwer e gouarnamant breizh 30 ltr 11
skouez 30 ltr 11
estrem 30 ltr 11

Anañ an sec'hant dre c'hakano-baer[1]
mandat-baer[1]
c'hakano-baer[1]

(1) Diverket pe getret na servilout ket.
C.C.P. RENNES 2365-76.

Bep daou vis lennit

AL LIAMM

ar gelaouenn nemeti o reñf, c'hwec'h gwech ar bloaz, barzhonegoù, kontadennoù, pennadoù a beñ seurt ha keleser, 80 pajenn e peb niverenn.
Renner : Ronan Huon

Koumanant : 30 ltr. Studierien : 25 ltr
Mme S. CHEREL, 109, bd de Verdun
RENNES - C.C.P. 2184-34 Rennes

LEVRIOU BREZHONEG (Kozh ha newez)

TI GIRAUDON
30, Straed Keranpont

22300 LANNUGON

Pg. 35 04 90

DA ZESKIN BREZHONEG

HA D'E BEURZESKIN

UL LEVR NEWEZ SAVET
GANT FANCH MORVANNOU :

ASSIMIL

«AR BREZHONEG DIDORR»

AR FALZ

kelaouenn drimistieg an Emzaoz
dizaset gant Yann Sohier
bodet ennañ skolaerien ha kelemerien
Vreizh

a-du gant eus skol-vreizheg ha laik
gwitron

Lennit Ar Falz ! Koumanantit d'ar Falz !
(25 ltr ewid 0 niverenn)
Ar Falz, straed Kan-ar-Gwez
29245 Plourin-Montroules
C.C.P. 430-20 H Roazon

MOON N'EO KET MANN EBED

"MOON" A WASK
HAG A ZISTRUJ
SPERED HON BUGALE -
"MOON" RA TRAOU,
MEKANIKOU
GANTE!!!

DIWALLIT
DIOUZH!
"MOON"!

"MOON" A
VREW ANEHE,
DI DRUEZ, KORF
HA SPERED!!!



753 TAPET
HIZIW,
50 000 000!
WAR C'HOAZH

"MOON" GANT AN DIAOUL

MED MA VREW
ANEHE KORF HA SPERED...
AL LOEN HUDUR... PETRA 'RA
AN ARME, AN ILIS HAG HE
LESENNOU, AR SKOL, AN
USIN, AN TELE!! HUALAN AN
DEN DA ZAMESSA ANEHAN
GWELLOC'H!!



SELL TA AR
PENNAD BLEW HIR-SE,
SKOIN GANT "MOON" MA
PEUS C'HOANT, HENNEZH
ZO UN ORIN, MED N'ES
KET PAOTR, DA GLASK
FAOT GANT AN
DUD A-VOD!!!



NONO